

ANTIC voar buhez ha maro an Autron SANT
RONAN, Patron eus a Locronan Coat - Nevet :
Voar Ton : Guers Olofernes.

25

S Aludomp oll guitibupan
Hor Pastor biniguet Sant Ronan
Da veza roet un donz'fon
Ebars er Vro hac er C'hanton,
Da veza leset e Gorf Santel
En ur mervel e Breiz-Ilfel.

Er Forest eus a Coat-Nevet ;
Eleac'h ma en devoa bevet
E yun, abstinanç, orañson,
Eno en deus leset e Galon,
Evit ma vezo enoret

A bep leac'h gant ar Vretonet.
Eus a Islandr e oue savet

Demeus a Guerent Payanet ;
Ha dre ma en devoa speret,
O songeal e vise den ar bet,
E lequesont da studia,
Ma tûas eus ar re capapla.

Ar profit bras eus e studi
A ras dezàn dont da gredi
Er Feiz hac er Religion,
Doue en deus touchet e galon
D'en em renta souden Bâlec,
An Aviel Santel da brezec.

Crisqui a ra er vertu bepret,
Bete ma voa Escop sacret,
Hac evit guell servicha Doue
En deus quiter an enor-ze,
Eo bet deut e coste Leon
Evit vaqui d'an Orañson.

Eno souden e voa anaveet
Gant un nombr bras a Bretonet ;

Voianmour d'ar Miraclou
A ree Doue dre e bedennou
En andret ar re affliget
A zeue a bep-tu d'e velet,
Goude e Querne a passeas
Gant un Æl dreist ar mor glas,
Pe gant hini e voa rentet
Er Forest bras eus a Never,
Da bellat c'hoas dious ar bet,
Ha chafcal an Drouc-Speret.
Ur Paysant mat ha gracios;
Gant joa o clevet comsou Jesus;
A zavas ur Lochic er C'hoat
Evit repui ar Prelat,
Ha chelaou e antretien
Da gaouet digantâ sclerigen.
Ac'hano e chafseas timat
Ar serpanter emez ar c'hoat.
Hac un nombr bras a Sorcerien
A dourmante ar C'hristenien
Gant cals eus a goal sperejou
A glasq bepret coll an enco.
C'hoas e voa chomet er plaç-màn
Ur Vræc mechant hanvet Queban,
Pehini dre e dallenti
Ne false quet dezi distrei.
Hac evit clevet comsou Douc
Ne devoa evitàn nep carante.
Ne devoa quen reproch da ober
Dar Sant, nemet divroet truffler;
C'hui so quiriec da dud ma zi
Nos ha deiz da fencanti,
Da zileser græc ha bugale
Da felllet ouzoc'h, tra didalve.
Ar Vræc-màn ne anaye quet
Ar mat a rente d'he friet,
Pell diouti e voa ar sonch-ze;

Liec'h ~~ma~~ e ene;

E oll souci e voa caouet

Ar madou tromplus eus ar bet.

Rac-se dre ur c'hassoni bras

An den santel a accusas

A-zirac ar Roue Grallon,

Pehini a rentas dezàn rason;

Dre ma e devoa hep guir ebet

E merc'h dar Sant-mâ tamallet.

Ar re coz o deus lavaret

E devoa e merc'h anfermet

En ur arc'h ferret gant un alc'hue,

Evit donet dre ar voyen-ze

Eus ar Sant en em disober

Hac e chassal eus ar c'harter.

Quemeret e voa gant Sergeantet,

Ha gant querden clos amarret,

Accuset er Guer a Guemper

Evit ur Muntrer ha Sorcer,

Da veza ar plac'h devoret

Evel un den bleiz affamer.

An oll e Quer voa estonet

O velet ar Sant-mâ tamallet

Gant Queban dre e c'hassony

Eus ur c'hrim capabl d'e zevy;

Goude beza quement servichet

Da dut e zy ha d'e friet.

Prest e voat da ober e broces,

Pa supplias tud ar Palæs

Da c'hortos disque ar c'horf maro,

Hac e velgent eus ac'hano

Pe con a voa coupabl, pe ne voa quet,

Eus ar c'hrim ma e voa tamallet.

Doùe da zisquezi ar viryone,

A laquas ar plac'h e buhe,

Hac a zifclerias publicamant

E voa an den santel innoçant,

4
Ne voa nemet e Mam gruel
En devoa-hi lefet da vervel.

Buan an testou pratiquet
Da souten ar c'hrim invantet
A zispariffas incontinant,
Hac hep gortos o faeamant,
Rac aon da veza punisset
Hervez ma o devoa meritet.

Na chomas anezo er Palas
Nemet Queban ar vechantes,
Evit pehini en em strinquas
Ar Sant-màn voar e zaouin c'hoas
Da requeti digant Grallon
Eus e zorfet dezi pardon.

Neuse e velas ar Roue
Ne voa digacet gant Doue
Ar Sant-màn ebars er c'harter,
Nemet evit heulia hor Salver,
Ha pratiqua ar vertuzyou
En deus ordrenet hon Autrou.

Ar Roue a Guemper-Caurintin
A zeuas d'e velet gant e Drain ?
Ar Sant goude o Sperejou
A zubbstantas ivez o c'horfou,
O rei dero oll da leina
Gant daou pesquic ha tri bara.

Evel ma ye dre ar c'harter
Evit prezec an Aviel,
E teuas tud difeis ha dinvat
Da redec a-dreuz dre ar c'hoat
Gant mein ha bizier a zaou-ben
Oc'h avisa terrie ben.

Hoguen gant Doue e voa preserret
Ha disquet dez o zorfet,
En deus castiet ar plaç-màn
Abalamour da Sant Ronan
Dre ur Vocen gris ha garo,

Ha voar cals a dut eus ar vro:

Un deiz pa oa o contempli
En ul Lêvr var dreuzou e di ;
E passeas ur bleiz er c'hoat
A-dreuz en e vec un danvat
Prest deja da veza etranglet,
Pa voa gant ar Sant dilivret.

Ur gomzic hepquen eus ar Sant
A laquas ar bleiz ravissant
Da renta e zanvat paquet
Dirac Queban hac he friet,
O clasq disquez dre quemennàn
E dallenti bras da Queban.

Retourn a ras ar Sant e Leon,
N'ouzer quet an occasion ;
Abars nemeur e voa galvet
Gant Doue da renta e speret,
Da roi dezàn en Eê ar gloar
En devoa meritet en douar.

Pa voa an den-màn o tremen,
E clever an Ælet en En
Oc'h ober ur c'har, ur meuleudi
Hac a ravisse pep-hini,
Sign eus ar gloar dezàn preparet
Er Barados gant an Ælet.

Tri Escop o deus disputet
Peleac'h e vize enterret
Ar c'horf eus ar Prelat divin :
Daou Ægen gouez a laquas fin,
Pere o vez lest e liberte,
En digallas en Douar Querne.

Hep gortos sicour digant den
A-het an hent evit o ren,
E cassont ar c'har dre ar vro
Ma voa lequeet ar c'horf maro ;
Gant Doue hepquen e voant bleinet
D'en em renta e Coat-Nevet.

Herzel a refont er plaç-màn
 Ma zeo batiffet Locronan,
 Goude m'o devoa gret an dro
 A re ar Sant pa oa beo,
 Da faludi c'hoas ar plaçou
 Enoret dre e bedennou.

Pa voa oc'h ober an dro-màn;
 E rancontr adarre Queban,
 Pehini p'e deus-an guelec
 A voa ous ar Sant coleret,
 A scoas gant he golvas pren
 Hac a dorras corn an Aegen.

Pa voa ar c'horf-màn arretet
 E plaç ar c'horn bremàn hanvet;
 Rac an Aegen a voa scoet
 A voa e gorn d'an douar couezet,
 Mæs dre permission Doue
 E itagas en e blaç adarre.

Queban o veza decedet,
 En douar profan oe laquet
 Var an hent bras pell dious ar Sant;
 A so exempl d'an dut mechant,
 Er menez entre an diou Barres,
 Ma vize anezi fonch da james.

Endra vezo douar er plaç-màn,
 E vezo galvet Bez Queban,
 E c'horf a so eno laquet;
 E ene ne ouzer peleac'h eo eet,
 Dre n'hon deus assurance a-gren
 E deffe grêt tam pinigen.

Un dro bep c'huec'h bloas a ve gret;
 An Dromeny ez eo hanvet,
 A re ar Sant var yun bemdez
 A-dre ma zeo bet e buez,
 Toft da teir leo var-dro e dy,
 Da chaffeal pell ar bleizy.

D'an eil Sul cus a Vis Gouero

7
Eo instituet pell amser so ;
Da c'hounit Induljanç plenier
E teu an dud a bep carter ,
Evit enori ar plaç-màn

Ma zeo enterret Sant Ronan.

Guelet eo bet ar Relegou ;
Ar C'hroaziou hac ar Banierou
O vont da ober an dro-màn ,
Ar c'hleyer o son o-unan ,
Pa eo bet control an amser
Da arreti an dud er guer.

Ur bloavez oc'h ober an dro ,
Ne tavas morse tout ar glao ;
Ar Parruriou hep beza glibet
Voar ar Relegou biniguet ,
A voa rentet seac'h corn er guer ;
Evel pa vige bet caër an amser.

En-dro d'ar menez pa bignet ;
Flamou tan a so bet guelet
O vont o tont diveich patant
A-euoc'h Relegou ar Sant ;
Doue o tisquez da bep-hini
E plige dezàn an Dromeni.

Diabars eo savet ar Chapel
Gant an Duquet a Breiz-Isel ,
Ha goude eo augmantet
Gant ar Roue hac ar Princet
Demeus cals a bresanchou ,
Abalamour d'ar Miraclou.

Goude an Itron Duques Anna
E deus laquet retablissa
Ar plaç eus ar bez biniguet
Ma zeo Sant Ronan enterret ;
Da goul eno digant Doue
Ar brospérité d'e ligne.

Cals o donet da dal e ve
O deus en em gavet pare

Emeus a cals a clenvejou ;
 Ha dreist pep-tra ar guilioudou ;
 O pidi hac enori ar Sant
 Int gret salo incontinant.

Protectour mat eo ar Sant-màn
 Ha d'ar re vras ha re bihan,
 Pa deuer d'e dy d'e enori
 Hã gant devotion d'e bedi,
 Ha da roi ar soulageamant.

A bep fort poan ha pep tourmant.

Nombr a vugale tro-var-dro

Deja en articl ar maro

Dre intercession Sant Ronan

So bet lamet emez a boan,

Dre graç special a Zoue

Rentet dirac an oll pare.

Ar groaguez so bet soulager

O veza dezâ en em voestlet,

A ell lavaret ar virione,

Penaos oa caret gant Doue,

Ha peguement e plich dezân

An enor rentet da Sant Ronan.

Ur ouez dour so tost d'ar plaç-màn

So hanvet feunteun Sant Ronan,

En deus soulaget lies hini

Oc'h efa dour eus anezi,

Eus an drouc pen ha catarou,

Terien ha guentl dre ar memprou.

E mis Even an deis quenta

E bers ar Gowel eno bep bloa ;

Pa en deus pliget gant Doue

Roi an fort tenfor er c'hontre ;

Pedomp-an a galon deis ha nos

M'hor c'honduo d'ar Barados. FIN.

*Composet ha tennet eus a vuhez ar Sant hac eus
 an Archivou an Ilis gant ur Belec, Chapalan,
 guinidic eus a Locronan,*